

CANTIC

VAR AR BEREOJOU

Var ton : *Sunt-Cado.*

Me ho suppli, Speret Santel,
Roît din sclerigen hep appel
D'ober eur c'hetic d'ar berejou,
Uil ha profitabl e peb bro.

Pa meuz cavet eun tam amzer,
E teuan da formi eur matier,
D'ober eur c'hetic d'ar verret,
Vit ma vo moyoc'h respectet.

Selaou, va breur, clevit, va c'hoar,
Eur guentel ha non pas un histoar
Ha grit varnezi reflexion
Marteze e toucho ho calon.

Merquet eo ebars ar scritur,
An Ijis santel en assur,
Douguen respect d'ar berejou
Pa zeo eno repos ar c'horfou.

Ar groas sentinel zo er vered,
Var behini Zalver ar bed
Eur maro cruel en deus souffret,
Evit hon prena diouz ar pec'het.

Bars ar verred e man ar c'horfou,
Eus hon tadoù hac hor mamou.
Eus hor breudeur hor c'hoarezet,
Hor c'heren hac hor mignonnet.

Clevit eta ho moëz truezuz,
Ma en ho calloud n'och quet vit refus
Grit evite eun tamic peden
Evit calmi ho loan hac ho anquen.

Ho ped truez, c'houi, va mignonnet!
Ho ped truez deus ar re dremenet
Deac'h voa ho zro, hirio ho hini,
Ho ped eta truez ouzomp-ni.

Ha pa dremenot ar verret,
Pedit evit ar re decedet
Eur bater pe eun (de profondis),
Hervez ar chustum eus an Ijis

Arrexit breman, tud direspet,
Me ho suppli, pa dreuzot ar verred,
Soujitet mad er re zo enni
Evit oc'h arreti da bec'hi.

Ma caret sonjal coucoude,
E viot evel-to hep dale,
Neuze evit caout eur beden
E carfac'h g'elet tud o tremen.

Na gomzin quet a boaniou cruel
Vel o peuz da souffr er bed-all
Poaniou heb ho eternite
Hac a zepand diouz an ene.

Na gomzan nemet deus ar verred
Ha c'hoas ma c'halon so mentret,
Pa zonjan e vin enni interret
Ha cuzet deuz ma mignonnet.

Petra zervich deomp-ni sponta
N'omp quet mest da chom er bed-ma
Hom zud cos a zo consommet
Ho c'horfou en douar ar verred;
Hac hon re-ni a ral ive
Neuz quet ezomp da laret marteze.

Fachet a nep a garo,
Ar virionez certen a glevo,
Na jamæs ne lezin en secret
Ar pez a zo var ma speret.

Dre ze a laran d'an dud lubric
Petra servich constantin ar ch'ic ?
Consideromp an eternite
Ha nompas hon sansualite.

Petra servich magan hon c'horfou
Pa man er verred hon beïou
Pa m'omp magadurez ar prenvet
Ha pa veomp en douar rentet ?

Coulen a ran ouzoc'h, c'hui tud puissant
Perac en em vaguet quer vaillant
A zouar oc'h, da zouarn viot rentet
Pa moc'h magadurez d'ar prenvet.

Neus quet caz peguer puissant
Peguer terrupl, peguer vaillant
Hon c'horfou tout certen a yelo
Da dempzi douar ar berejou.

Respetet eta douar ar verred
Dre enni ho peuz bet passeet,
Da recevo ar vadeziant
Ha pa voac'h deut var ar bed-man.

Dre enni rencoit c'hoas passeal
Eoni viot laquet evel ar real
Ha pa sonjit an nebeuta
E viot casset desi da vreina,

Tut pinvidic, deut da glevet
Un avis eo, n' quet eur requet
Petra servicho deoc'h oc'h arc'hant ?
Ne raïnt nement cresqui ho tourmant.

Hoc'h arc'hant var ho lec'h a chommo
Goude an heur eus ho maro,
N'o pez hevit eritach
Nemet eur lincer, evit partach.

En pevar blanquen viot dastumet,
Cetu c'houi breman disheritet

Eus ho touar hac ho madou,
Cetu ennan ho recompançou.

Clevit c'hoas ganin eur reson,
C'houi pere zo sujet d'ar boesson,
Profitet outi mar em c'hredet,
Dre enni evitot calz a regret.

Pa vec'h mev e trejet ar verred
Evel tud brutal ha direspet,
Ha coucoude e clefac'h sonjal.
Ar verred n'eo quet hent vicinal.

Tremen enni en eur douet,
Prononç enni comzou dizonest,
Ha coucoude goude ho marou,
Hi recevo ive ho corfou.

C'hoas a laran d'an uzurerien,
Na vont quet contant hiviziquen
Eus an oll douar er bed-man,
Quen evit mont enni da vreinan.

Pa ya unan deus ar c'hontre,
D'ho cavout dre necessite
Da c'houi eun tam doar evit arc'hant,
Cetu aman ho c'hompliment.

Just eo var douar e larin dezan,
Ma garfe cavout c'hoas da brena,
Nan biquen avoalc'h n'ho pezo
Quen a vo carguet deoc'h ho quenou
A zouar ne viot quet contant
Quen ho po bed ho lod er verred.

Pa vec'h oc'h ober bailezou,
C'hui a vuzul an douarou
Er guisse deoc'h a vo ive gret,
Ho unan e viot mesuret,
Quemeret vo ho hed hac ho lehet
Aroc tailla ho lod er verred.

Douar vo ennan dindanoc'h,
Douar a bep tu, douar varnoch',
Cetu c'hui breman e creiz an douar,
Na velet nac an eol nac al loar.

Pa zeui ho archet da vreina
An douar o tostaat dioula,
Neuze marteze vo peur grignet
Ho esquernigou gant ar prenvet.

Mar vec'h dezi hirio casset,
Ho querent hac ho mignonnet,
A rafe ganeoc'h caoniou bras
A bado marteze betec varc'hoas.
Mes me hoc'h assur a ben eiz de,
A vo collet gant-hô ho pe



Quen buan ma viot cuzet,
Gand an douar eus ar verred,
Quer buan a viot ancounac'het,
Gant ho querrent ha mignonet.

Cals a boan hoc'h eus bet coucoude
Clasq rapina dezo danvez
Bremâ int occupet bras ha bian,
Mes nou pas gant a loden vian.

Cetu ennan petra zo quiriec,
Ma vec'h quentoc'h ancounac'het,
Rac n'eller quet a barfetet,
En daou plaç posa ar speret.

Cals ann boa aves a laqueat
Da vesur eun tam bouet d'ar prenvet
Hep sonjeal en hoc'h hene
Ac en da badout en eternite.

Ar pez a so ar principala
A die beza servichet da guenta
Mes ped den a vev er bed.
Eguis no daffe ine bed.

Ma ve deoc'h hirio annoncet
Eveach varc'has disi casset
Ac o pe dec mil scouet leve
En ho plaç ha piou a haffe ?

C'houi ve contant da chom coucoude
En plaç ann hini a vœ an hirra e vue
Ac eve red dezan ober tro an hencho,
Evel ar paourra so er vro.

Mes petra so quiriec da se
Ne ma queut en etat oc'h hene
Ar sept biscouas n'o deus spontet
Rac en douar benniguet.

Z'housarvout a ra gante ar memes tra
Evel eun den o tiloega
A ha da eur plaç caer meurbet
Dioc'h a unan disperitet.

Rouantelez an aotrou Doue
A so carguet a bet seurt levenes
Mes pa ielo di an ineou
E saïl dar verret hor c'horfou.

Labourat a rit gant couraich
Pa veach o vatissa eur plaç
Var digare het da chom dezan
Mes pegueit ao sur da chom ennan ?

Labouromp eta evit an evo
Rac nicum a hanomp ama na chomo,
Rac ar bet ne ra nemet tremen
Er bet al evit da viquen.

Mæs ar pes a gresq va eston
Pa ran varnezan reflexion
O velet peguen nebeut a interes
A so evit an ene ques.

Ar c'horfou brein a vaguer.
Dillicata ma heller,
Ne seuan quet den excusi
Va unan a bliij din reposi
Ne faud quet din beza genet,
Na gant netra beza tourmantet.

Pa vezan squis memes e.n gouële
E teuan er meas, pe chenchan coste
Mes allas pa vezin e verret
E vezin var ar memes tu bepret.

Douar santel a berejou.
Chui a receo an oll gorfou
Chui a receo ar bec'herien
Coulis hac an dud a binigen.

An oll sent ac an oll æies
Dar verret e vesont tout casset
An noblans, memes ar Rouane
Ac ar paour hep difficulte
Dar verret e saïl ar c'horfou
Daoust peleac'h e saïl ac inéou.

Er verret neus quet a brimote
Evit an dud a galite
Mes ar henta vo lianet
Arauc d'ar verret e vo casset.

Cetu aman an differans so
Deus an andreajou er berejou
Besa so eur plaç destinet
Evit lacat an huguonet,
Ac ar re en em brecipito
A vo plantet ives eno.

A hent all neus quet a sifferans
Dre ar re duil ac an noblans
Nemet or re deus calite
O deus var nezo eur mean bez.

Bez a paour so anavezet
Dre a berniou douar dre ar verred
Hep mean ebet enno e chommo
Quen a vo tennet e relegou.

Beyou ar superiorei
Eo ar re huellan a so zavet
Evit rei d'a c'houzout d'ar re a dremen
Pere eo ar beyou ar veleyen.

Mes evit gouelet o beyou,
Nouser pe monden pe zalo
Eo ar re so dindanne
Nac an habilla na oar quet se.

Apparisset eo bet o ine
En tribunal ar viryone
Gout a ouzont petra o deus gret
A ne nomp nemet azenet.

O douar santel ar re verred,
A te zo da veza cals respetet,

Te a ra deomp gouelet defotou
Quercouls hac ar mad oberou.

Pa sonja n'ennoc'h douar sanctel
E sco em c'halon eun laol gontel,
Pa sonjean e vezou coublet
Va c'horf gant dour ar veret,
Ne vo quet anavezet quen goude
Va relegou dioc'h o re.

Hon ascorniou pa vezint tennet
A vo taulet quen direspet
Dre ar vered ac ar garnel
E faç a glao ac an avel.

Aben eur mareat goude
Evesint destumet adarre
Evit enterri or relegou
Evit a veach diveza quen avo,

Allas a hanno ne savimp quet
Quen a vo an deis diveza eus ar bet,
Quen a vo deis a jujamant
O deves terrupl ac a epouvant !

Eun al a deso a bers Doue
Da son a trompli da bep ene
Da en emp gaout er berejou
Eleach'ma seo anterret ar c'horfou.

Lavaret a raint d'ho c'horfou sao alesse
Ma en em assemblomp adare,
Gouechal pa voac'h var an douar,
Evoac'h leun an enor hac a c'hoar.

Te a heuil-se da santimant,
Bremen te po commandamant
Deomp eta en unan hon daou.

Da vont pe d'an naec'h pe d'an draou.
Essamp da ober hon demeuranc
Er vuez nevez a gommanç.

Sav alesse a sao buhan,
Mar saimp hon daou en unan,
Deomp-ni da draosen Josaphat,
Da glevet ho selang diveza.

Me a requet a vir galon
Clevet moeg an tri pherson,
O guervel a den an deis-ze,
Deut oll ganen va bugale.

O caëra coms e ve ounes
Ma laverfe deomp Map ar Verc'hes
O hene e tan purifi d,
O corfou en douar breinet
Hac a veri: evit recompanç
Ar barados evit de-neuranc.

(Propriété.)

RÉCIT

Deus ar Maleuriou arruet en departement ar Var

AN DRO DA SANT-ETIENNE

OCCASIONET GANT AN ORACH AR 14 HAC AR 15 A VIS EVEV DREMENET

Jesus, ma Salver adorabl,
Obtenet d'ho pec'her ingrat
Ar slerijen da discleria
D'ar Vretonet dre ar vro-ma.

Speret-Santel deus an env
Gret din esplican hep dale
Ar suit demeus ar maleuriou
Hac an darn deus ar miraclou.

Quement-mà so bet arruet
En départamant Var hanvet.
Dre deluch dour ha euruno.
Hervez ma rapport ar c'helo.

Ma speret so epouvantet
Ha ma memoar a so troublet
O tonel da sonjal esplican
Eur malheur an effroyaplan.

Eun illis banvet Sant-Germain,
Eun templ santel d'ar gristenien
Gant ar c'huruno attaquet,
Etre ma voa en ofern bred,

Habitantet leis an illis
A voa o assistan en offici :
Den neus gallet sortian ;
Oll o deus renquet perissan

An douar a deu da grenan
Hac a ra d'an illis coean
Var gein quémend a voa enni,
En eur momet, d'ho ecrasin,

O ma Jesus ! tristant malheur !
Dre eur merq dimeus ho couleur
Perisset tud an ofern bred
Hep ma so hini sortiet

Totaliset gant tud savant,
Var ar bord a pevarzec kant
A voa en illis biniget,
Hac a zo devet ha beuet

Nebetoc'h evit eur c'hard heur
Goude ma voa fin d'ar malheur,
En plaç an illis so cavet
Eur stang hir ha ledan meurbet.

Flottanç ar caeran batimant
So cavet a donder er stang ;
A c'hoas e lavar ar scritur
Ne dap quet ar fonç ar mesur.

Pedomp Doue ar vir galon
Da accordin deseze pardon
Ha d'ho laqat oll da repos
Er gloar demeus ar barados.

An autre Richard, deus e di,
Dious e tud o quimiadi,
A guemeras e diare
Da vont da ober eun dro chasse.

Pa voa et dec pas dioute,
E retorn en dro adare,
Hac a lavar n'eur guir cren
Adieu, ma zud evit biquen.

An itron, o clevet anezan,
A commanças da hirvoudan :
Perac, ma bried, emezi,
E teut cren d'ho abandoni.

Evel ma hantre er c'hoat bras,
An dour varnezan a deuas,
Hac en em retir heb appel
E appu, er span eur roc'hel.

Assambles gant an dour couran
E commanç un tan violent,
An tempest hac ar c'huruno
Quen o sonje a voa maro.

Pardon, ma Doue, emezan,
Aman e renquant périssan,
Eb gallout en em repuin
Ha bean cals a vado din.

En eur sevel var eur garec,
E mens bet apercevet
An tan coet dious an evo
Var ar noblanç hac e vado.

O pebes desolation
A antreas en e galon
Guelet consommi e vado
E vreg hac e vugaligo !

An itron o velet an amzer,
A supplias prest e mevel
Da voned da glasq he briet,
Mar guie pellec'h e voa eet.

Evel ma c'hantre er c'hoat bras,
Soudan gantan e erruas,
E appu a span eur roc'hel
Hac e disposet da verzel.

Sevet ma mest paour : emezan,
E oc'h var ar poent da perissan,
Gant Doue è eo preservet
Ho bugale hac ho bried.

Respong a eure d'e vevel
E lezel eno da verzel,
Pa ao consommet e vado,
E vreg hag e vugaligo.

Renquot a ra touet dézan
Quen men deus credet anezan,
A voa preservet gant Doue
E bried hac e vugale

Gant cals a boan hac a courrach
E teujont er mæs ar c'hoat bras
Ea dour betec o diou gazel,
An otro-man hac e vevel.

An otro so n'en vuestet
Dre eur miracl e vo rentet
E quichen gruio a vezet
Nevoa e tud evit souten.

Pa voa gant e tud o parlant,
E teu var e lejc'h un torant
Hac a vezena voa ennan
Neus groet dezan perissan

Chetu i chomet itanves
Ha hi leun a tristidigues,
Er vocen gant e zri vuguel
Hac i dispozet da verzel,

Pa eo bet bolante Doue,
E eo et an dour ac hane,
Hac in sicouret da disquen
Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h heur ha tregont a amzer
In bet er voezen er mizer
Da soulagin ho c'halono
N ho d'oa nemert an delio.

Ar mest a commande er fo
An otro Sevenis e hano,
A voa attaquet gant au dour
Eb gallout dont da nem zicour.

Prozterni a ran dan daolin
Da supplian hon Mest divin.
Hac hon Mam santel ar Verc'hes
Da vezan e avocades.

Mar sovetean ma bue.
Ha ma ouvrierien a me,
Me a savo eun ti a c'haeran
Evit ar pevien er vro-man.

E nebeto'h evit pemp minuten
Eo beuzet e ouvrierien,
Ar forgeo, varc'hadoures,
Tout int perisset assembles,

Henor d'an otro Seveni,
Var an douar ha melodi,
Ha pa hei divar ar bed-man,
Ar barados da jouissan.



RÉCIT

COMPOSET A NEVEZ

Var un Tol Vaillantis

ERRUET A DOST DA PARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMEN ET

Var eun ton Nevez

Me o ped assistantet da clevet recitan
 Ma unan hon estonet dimeus a guemen-man,
 Ar pez a zo arruet var ar c'hopi gallec.
 Mar gallan gout ar leçon d'ho zrei en brezonnee.

Mes quent avanç davantach, e c'houllan sclerijen
 Digant ar Speret-Santel da riman pen-da-ben
 Quement guir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
 Ha d'ho esplican facil d'an oll en brezonnee.

Eur vreg yaouac maguerez o tistrei a Baris,
 Het da guerc'hat eur buguel eus a dy ar Bourc'bis
 Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
 Evit sicour o zevel ha gonit bara dè.

Dre eur c'hoat a renc tremen o vont da gaout ar gaer
 Hac eo bet attaquet, sivouas! gant eur voler,
 Hac en guisquet en bellec, o ton de bonjouri :
 Ar goad en e goaziet a deu da remui.

« Bonjour, eme an den-man, erru oc'h ma greg vad,
 — Ha dec'hu pareillament emei autre n'abbat ;
 Souezet hon ous o goellet aman ho paseal,
 Rac ar c'hoat man so brudet da vean eun doul fall.

— Doue, eme al laér-man ; a breserv pep hini ;
 Me so aman o vale d'a neun disanoï,
 Hac e meus ma blijadur o c'hortos overnia ;
 Da larat ma breuvial na deu den d'am zroubla. »

O kerzet en e c'hever en deus interrojet
 Da c'houl a belec'h e teue ha pelec'h e oa bet.
 O velet e voa ganti var e brec'h eur buguel,
 Hac en guisquet ar c'haëra, casi evel eun ael,

Goude eun deus goulenet outi incontinent,
 Ha ne devoa bet netra evit avangamant.
 O quemeret ar buguel da zicour e soigni,
 Da denna ar virione, ma galfe diganti.

Eus emei, autre n'abbat, arc'hant a meus touchet
 Cant livre a meus recevet evit e guemeret,
 Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
 Quet mont emes ar c'hoat man, an innoçant ha me,

— Na soujet quet quement-se, emean, ma greg vad ;
 Me a vo dec'h compagnon da vont er mæs ar c'hoat :
 E zoc'h gant ar gabiten, n'ho pezo droug ebet,
 Nemert ma ranquet rentan ar pez o c'heus touchet. »

A zindan e soutanen e tennas eur zabren
 Hac e savas anezi ractal a us d'he fenn :
 Hac e c'houlennas ganti ar yalc'h pe ar vue,
 Ha laret dezan pelec'h en deus laquet ane.

« Placet a meus aneze enn dro d'ann innoçant ;
 Goel eo ganen ma bue evit aour hac arc'hant,
 Caët a ret aneze o tont d'e zispaka,
 Ha lest ma bue ganen hac e hini gantan. »

Cregui a ra er buguel en eur memes instant,
 Evit dont de zispakan da guemer an arc'hant,
 Dre permission Doue e tapas ar zabren
 Ha gant eun tol, dre vonbeur, en deus rannet e benn

Hep m'en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,
 E renqas mervel eno er plac'zubitamant.
 Hag ar vreg hag ar buguel dre viracl so rentet
 Voar an hent bras pareabl, hep m'ho deus droug ebet,

Tri gendarm a erruas hac o deus goulenet,
 O veled ar goad diouti, petra oï arruet.
 Hac en deveus ispliquet diraze pen da-ben
 En devoa lazet ar mest dimeus ar volerien.

« Dont a reet ganemp-ni emezi, var o quis.
 Evit m'elfomp goele ar merq ho vaillantis. »
 Pa oue foullet an den-man, eo e armo cavet.
 Diou bistolen a daou den, eur sabren, eur sifflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac ho proces-verbal
 Unan demeus ar gendarm a ch'hoz enni ractal,
 Hac en em rentas pevar deus e gamarado
 Da velet o c'habiten var an douar maro,

Pa veljont an abijo e fellas d'he tec'hel :
 En eum rent a renquont pe deuan da vervel,
 Ha lezel ho garroti hac ho c'has d'ar prison
 En Paris e recevont ho c'hondamnation.